

# Al lizherenneg kodet

Ganti e c'halloc'h dirouestlañ al luziadelloù.  
An traoù a gavoù a gloto pep a lizherenn ganto.

Da skouer : ar gontell = L

<b>A</b>	<b>F</b>	<b>K</b>	<b>P</b>	<b>V</b>
<b>B</b>	<b>G</b>	<b>L</b>	<b>Q</b>	<b>W</b>
<b>C</b>	<b>H</b>	<b>M</b>	<b>R</b>	<b>X</b>
<b>D</b>	<b>I</b>	<b>N</b>	<b>S</b>	<b>Y</b>
<b>E</b>	<b>J</b>	<b>O</b>	<b>T</b>	<b>Z</b>
			<b>U</b>	

Dibab ho tudenn hag arabat disañjal kemer paper kalk hag ur c'hreton.

Delc'her a ra bev memor ar c'hrampouezh, p'he deus bet ur chemet kozh-Moe da herezh.

**Diskennades ur grampouezherez**




Mestr int war ar gouidolù, magañ a reont an dud diwar labourat an douar.

**Labourer pe labourer-douar**



Ergerzhour pe ergerzhourer an amzer dremenet, dizouarañ a ra sekredoù bet ankouaet.

**pe arkeologour**



Evit ober an enklask e rankit dibab un dudenn :

Skrivañ amañ ar 5 lizherenn ho po kavet

Ha prest oc'h da sikour ac'hanomp ? Klask ar ger kuzh evit digeriñ an arc'h ha dizoleiñ sekredoù ar grampouezherez divvezhañ martheze...

Hervez kont he defe kuzhet he holl ouiziegezhioù en ur c'houfr, a-raok mervel. Mia kavit anezhañ en-dro e c'hallio an holl dud lidañ ar Chandeleur adarre !

divvezhañ er bed a-bezh. ezhomm da gaout, na penaos ober, na gant peseurt armoù-kegin... Nemet unan, ar grampouezherez



E 3026 emamp, aet eo ar c'hrampouezh da get da vat. Kollet eo Breizh... Ne oar den ebet ken peseurt aozennoù a zo

**Fin zo d'ar c'hrampouezh !**

## Luziadell 1


Klask ar skeudennoù en dielloù a weler warno an doare ma veze fardet krampouezh.

Petra eo an 3 arm-kegin a veze implijet gant ar c'hrampouezherezed er film-mañ ?

- an hini evit diskargañ ar bas,
- an hini evit ledañ anezhañ,
- hag an hini evit cheñch tu d'ar c'hrampouezh.

Petra eo anv an arm-kegin a reer gantañ evit cheñch tu d'ar c'hrampouezh :

Klask an arm-kegin-se el lizherenneg kodet evit kavout lizherenn 1<sup>añ</sup> ar ger kuzh.



Mont d'ar sal war-lerc'h...

## Luziadell 6

Sellet mat ouzh an oberenn-mañ, ur fest en enor d'ar grampouezhenn zivvezhañ eo. Dizale e c'hallimp debriñ krampouezh en-dro, a-drugarez deoc'h.

Er sal-mañ, klask ar gemennadenn da zisifrañ gant ar sil ruz evit gouzout pelec'h emañ ar c'houfr.



N'ho peus ken nemet digeriñ ar c'houfr evit saveteiñ ar c'hrampouezh...

**Troomp ha troomp atav !**  
Istor(ioù) krampouezh

**Fin zo d'ar c'hrampouezh !**

**ENKLASK ER MIRD**

Gant ar familh pe gant mignoned, adalek 10 vloaz

## Luziadell 2

En daolenn gant Olivier Perrin e weler ar grampouezherez kentañ bet taolennet ouzhpenn 200 vloaz zo !

### Klask anezhi.

War betra emañ ar billig ?

Un daol, un trebez pe un tabore ?

Gallout a rit kaout sikour gant ar guverennoù-kreskiñ.



Klask an dra-se el lizherenneg kodet evit kaout eil lizherenn ar ger kuzh.



Ma'z oc'h diskennadez ur grampouezherez e c'hallit mont d'al lec'h ma kaner ar c'hrapouezh, evit diskalkañ ho henvamm...

Mont d'ar sal war-lerc'h...

## Luziadell 4

Mont war-zu ar plad torret. Rankout a rit adsevel anezhañ ha kavout ar pezh a zo skrivet warnañ...

Ha kavet ho peus an aozenn ret evit gallout ober krampouezh en-dro ?

Ur wech kavet, sellet ouzh al lizherenneg evit kaout 4<sup>vet</sup> lizherenn ar ger kuzh



Ma'z oc'h arkeologour pe arkeologourez e rankit skrivañ mat ar ger brezhonek a zo war ar billig. Gantañ e c'halloc'h-c'hwi digeriñ un eil koufr er sal ziwezhañ.



## Luziadell 3

Sellet mat ouzh ar film a zo bannet...  
Respont d'ar goulenn amañ dindan :  
Taolit evezh, kodet eo bet he c'hemenn gant ar grampouezherez...

Petra a ya ar plac'hig da gerc'hat d'ar marc'had ?

NChPOC'h C'h UC'h C'hN MIC'hAFD  
BC'h DChMC'hP B'C'hN PC'hUAC'hG



Evit diskodiñ ar c'hemenn :  
Dilec'hiet eo al lizherennoù eus 3 flas  
el lizherenneg. Da skouer : D a zeu da vezañ A

Ur wech kavet ar respont, sellet ouzh al lizherenneg evit kaout 3<sup>vet</sup> lizherenn ar ger kuzh



Mont d'ar sal war-lerc'h...

## Luziadell 5

E 3026 ne oar ket an dud peseurt mod eo ar plant a reer bleud diwarno evit gallout fardañ ar bas krampouezh ! **Dav eo skoazellañ anezho.**

Rankout a rit c'hoari evit kavout ar c'hreunenn a zo bet kollet.  
Dav eo lakaat ar greunennoù da glotañ gant an doareoù bleud.

Ur wech m'ho peus kavet ar c'hod e c'hallit digeriñ ar c'houfr a zo war ar siminal.

Arabat deoc'h disoñjal sellet ouzh an arouez a zo treset e-barzh evit kavout ar 5<sup>vet</sup> lizherenn.



Ma'z oc'h ul labourer pe ul labourerez-douar e c'hallit diskalkañ ar blantenn a blij deoc'h ar muiañ ha mirout anezhi ganeoc'h.

Mont d'ar sal war-lerc'h...